

# BEH D'AR BRILLI !

*(E-kreiz plasenn ar vourh, ema Jakez Krohen o klask gwerza pesked, kasedou dirazañ, goullou an darnvuia anezo).*

## Jakez

Pesked fresk ! Brilli, sardin, meilled a beb seurt ! Bihan, braz, hag etre daou ! Beh d'ar brilli, merhed ! Hastit buan ma fell deoh kaoud danvez merenn... Emaon gand ar hasedad diweza ha gweloud a reer ar strad dija. *(A-vouez izel)*. Kurun ! An dud a zo deut da veza dezo begou lipous en deiz hirio. N'eus mad evito ken nemed ar hig-rost hag ar yer poazet er forn. Ar re goz gwechall ne oant ket ken reketet... *(Oh hopal)*. Beh d'ar sardin ! beh d'ar meilled ! Marhadmatoh eged leh all. Hag ouspenn ugent real dre gant a zistaol hervez al lezenn. Pesked fresk, deuet er-mêz ar mor an noz-mañ.... Beh d'ar brilli !... An dibab d'ar re genta !

## Gwillou

*(O tegouezoud).*

Ma, siwaz ! te zo aze, Jakez, a-dreñv ar hasedadou pesked, e-kreiz plasenn ar vourh, oh hopal a-bouez-penn hag o kana meuleudi da varhadourez ? Penaoz 'ta ? Da werza pesked ah-eus 'n em lakeet, nevez 'zo ? Ar henta kelou !

## Jakez

Gortoz eun tammig, Gwillou. *(Uhellouh)*. Beh d'ar brilli ! *(Izellouh)*. Eun dousenn sardin mahagnet hag eur vrezell goz bennag a chom c'hoaz ganin da werza. Goude-ze me 'ziplego dit an taol. *(Uhellouh)*. Deuit tost, merhed ! Setu aze eun tamm boued fresk, ha yahuz, ha founnuz, ha tener a-walh da veza debret, drein hag all. Marhad-mad vil ! Evid netra, koulz lavared. Beh, beh, beh !

## Gwillou

Jakez !

## Jakez

Petra 'ta ?

## Gwillou

Te 'gav mad pesked ?

## Jakez

Eh ! Droug-kalon am-eus pa zellan outo. Prezeg din diouz eun tamm kig-sall gand avalou-douar en-dro dezañ. Hag eur podad jistr da zikour lonka an tamm. Eur mell podad, evel just... Med pesked ! teil, sell ! *(Uhellouh)*. Beh d'ar brilli, merhed ! N'eus netra gwelloc'h eged ar brilli !

## Gwillou

Te 'zo eul lapous a zen, Jakez ! Ar pesked a ra dit c'hoant dislonka, hag emaout da vad o fougasi ar brilli d'an dud ! N'ah-eus koustiañs ebed ?

## Jakez

Sell 'ta ! Ha dao eo d'ar marhadour implij e varhadourez ? Yann Futellig en-deus greet fortun o werza limonadez, ha koulskoude an den-ze, 'ouzon mad, n'en-deus evet morse beradenn limonadez ebed en e vuhez. Re vad e kav ar gwin ruz evid mond da zistruj e deod gand dour-feunteun.

### Gwillou

Ha gantañ ema ar gwir, Jakez. Gwelloh e vefe bet dit mond da werza gwin ruz, me 'gred. Marhadour gwin, setu aze eur vicher, ma den. Torr-penn ebed, nemed chom brao e-tal ar hontouar da leunia ar gwerennou ha da zastum an arhant en diretenn.

### Jakez

Doue a viro ouz kement-se, Gwillou. Ne badfe ket pell ar stal hag an ostiz a yafe d'ar vered d'an daoulamm. (*C'hoarzedeg*). Brilli bihan ! brilli bihan ! Beh d'ar brilli !

### Gwillou

Jakez ! Kreisteiz eo pell 'zo, ha sonet an añjelus. Eet eo an dud d'o merenn. Kouls eo dit distalia, ma mabig, ha dond d'ar gêr da glask eur begad bennag. Eur gwall-labour ah-eus greet ar mintin-mañ, rag an dour-pil 'zo war da dal. Me 'gred din da roched a zo da waska, ken gleb eo ?

### Jakez

Feiz ya 'vad ! A ! Gwillou, an den paour en-deus eur blanedenn divalo war an douar. Beb seurt micheriu eo red dezañ ober evid gounid e dammig kerh. A ! tristedigez ar vuhez !

### Gwillou

Med, Jakez, n'ah-eus ket aon diouz Lik Penn-Ruz ? Honnez an hini a zo boaz da zond da werza he fesked war blasenn ar vourh. Ma ouezfe ah-eus laeret he flas dezi, ne rofen ket daou wenneg diouz da vleo. Ha diwall mad da zaoulagad, paotr koz, rag ivinou he-deus ken lemm hag eur falz. Aze vefe eur gwall zispah. Gwelloh eo mond kuit a-raog.

### Jakez

Arabad en em chala eviti kement-se, Gwillou. N'eus trouz ebed da gaoud gand Lik Penn-Ruz, peogwir eviti eo emañ o werza ar pesked-se.

### Gwillou

Eviti ? Penaoz eo degouezet ar jeu-ze ?

### Jakez

Gortoz eun tammig c'hoaz ! Setu mestrez Kerlaeron an Trest o tond gand an hent. Marteze e teuin a-benn da zanka warni va restachou pesked. (*Uhelloh*). Brilli ! Beh d'ar brilli ! (*D'ar vaouez a zo o tond*). Chan al Louarn, deuit tost 'ta ! Ganin zo pesked euz ar re wella, mad da zerhel tomm da gov an dud er parkeier. Sardin, meilled, boued kaer ! N'int ket pesked brein, nann, med stard ha reud an tamm anezo. Evidoh e rin kalz distaol. Koll am-bo, med n'eus forz. Ar rest euz ar hased evid pemp lur ha tregont. Brilli fresk ! (*Tremenet eo ar vaouez heb tostaad*).

### Gwillou

Netra. Mond a ra kuit heb trei he fenn. Poan gollet, Jakez. Ar vaouez-se ne gav ket mad pesked.

**Jakez**

Eo, kaoud mad a ra. Nemed re ger e kav anezo ivez. Atao eo re ger peb tra evid an dud skragh. Hag honnez, ar beg moan-ze, ne ra ken kaletaz seh d'he mevelien da zebri. Boullhurun ! mez a dlefe kaoud. Eun dismegañs eo.

**Gwillou**

Lez da gas, Jakez ! N'eus netra d'ober gand tud e-giz-se. Kont 'ta din kentoh penaoz ah-eus greet afer gand Lik Penn-Ru evid gwerza he fesked.

**Jakez**

Setu. Gouzoud a rez, ma gwreg Katellig e teuz an arhant etre he daouarn gwasoh eged an erh dindan an heol.

**Gwillou**

Ya, siwaz.

**Jakez**

N'eus ket pell he-doa prenet eur verhodenn kaer meurbed, gwisket gand voulouz, dantelez ha seizennou aour.

**Gwillou**

Eur verhodenn, paour-kêz den ? E-giz ar vugale ? Nag evid petra ?

**Jakez**

War he meno, an Itronezed, e kêr, o-deus merhodennou e-giz-se war o gweleou evid ober cheuh. Hag eo koustet ar verhodenn-ze tri mil lur.

**Gwillou**

Tri mil lur, Gwerhez Vari benniget ! An ourgouill a zo loen evelato !

**Jakez**

Ya. Med diwar an dispign braz-se, abaoe eiz devez 'zo, ne oa mui gweneg en ti. Ne hellen ket zoken mond da gerhad ma lodenn-win e ti Lomig, na ma lodenn-vutun e ti ar Gwichaoua. Glaharet-broust e oan.

**Gwillou**

Peadra zo. Kurun a dan ! Tamm butun ebed, ha banne gwin ebed ! Tra-walh da lakaad eur hristen mad da zond sod-nay... Sell, Jakez ! Me 'zo ivez er stad-se. Eur miz 'zo n'am-eus ket gwelet liou eur pezh pevar real. Marianna-bizied-krog ne zispeg morse diouz alhwez an armel. Trist eo. Ha ken izel on rentet ma rankan chaoka bouloutenn ma zog evid kas c'hoant butun diwarnon.

**Jakez**

Butun on-devo a-raog pell, Gwillou, hag eur banne gwin da vond da heul.

**Gwillou**

Gwir eo, Jakez, pe oh ober goap emañ ?

**Jakez**

Re wir. Ar mintin-mañ, eet skuiz o chom en ti d'en em chala, on deut d'ar vourh da glask an tu da hounid eur gweneg bennag evid torri ma zehed ha tana eur hornad butun. Ha dres e oa Lik Penn-Ruz war ar blasenn gand he harr bihan leun a gasedadou pesked. Hag hi da helver ahanon : « Jakez Krohen, emezi, n'ah-eus netra d'ober hirio ? - Nann, me 'lar - Ro din eun taol-dorn da werza ma fesked ha ne 'po ket da glemm gand ar priz. Penaoz 'ta ? me 'houlen. - Chom amañ gand ar seiz kased-se, emezi, e-pad ma vin war ar mêz gand ar harr bihan. - Memestra, me 'lar dezi. - Me roy dit eiz real dre zousenn sardin gwerzet ha trizeg gweneg dre vrezell. - Mad an traou. » Hag hi kuit.

**Gwillou**

Eun taol chañs evidout, Jakezig. Ha ped a besked ah-eus gwerzet ?

**Jakez**

Eiz dousenn sardin warn-ugent ha triweh brezell. Ar brilli n'int ket eet gwall gaer er-mêz, rag eur c'hwez spontuz a zo ganto. Moarvad ar pesked-se o-deus greet eun dro beteg Pariz gand an treñ a-raog dond d'ar gêr.  
(C'hoarzadeg).

**Gwillou**

Ha pegement a arhant ah-eus da gaoud digand Lik ? Eun dornad brao, me gred ?

**Jakez**

Seiz lur ha tri-ugent ha pevarzeg gweneg, na muioh na nebeutoh.

**Gwillou**

Siwaz ! Setu deut Jakez Krohen pinvidig. Dond a ra an dour em daoulagad pa zoñjan e vo ganit bremaig arhant a-walh evid skarza eul litrad gwin e ti Lom.

**Jakez**

Goustadig, goustadig ! Hag ar butun ? Eur pakad butun ? Eur pakad butun da genta e ti ar Gwichaoua. Ar rest a yay d'an ostaliri.

**Gwillou**

Te 'zo eun den a skiant vad, Jakez. Eun tamn butun a ray kalon deom ive. Ma Doue ! Gweloud a ran dija ar maged glaz o sevel dindan ma fri. Peseurt c'hwez, ma mignon ! N'eo ket c'hwez brilli brein, nann !...

**Jakez**

Klevoud a ran dija trouz ar gwin ruz o tivera 'barz ar werenn. Peseurt blaz, Gwillaouig. Krena 'ra ma zeod 'barz ma beg, kement a vall am-eus da dañva...

**Gwillou**

Jakez, setu ema Lik Penn-Ruz en-dro gand he harr bihan. Greet eo ganit ar gont ?

**Jakez**

Ya, prest on da douch an arhant.

**Lik Penn-Ruz**

*(a deu tre).*

**Gwillou ha Jakez**

*(Asamblez).*

Devez mad, Lik Penn-Ruz. Kavet zo bet gwerz d'ar pesked war ar mêz ?

**Lik Penn-Ruz**

N'eus ket da glemm. Devez mad, Gwillou. Ha te, Jakez, peseurt aferiou ah-eus greet er vourh ?

**Jakez**

Mad a-walh, Lik ! Eiz dousenn sardin warn-ugent ha triweh brezell. Setu, hervez an emgleo, am-eus gounezet seiz lur ha tri-ugent ha pevarzeg gweneg. Just eo ar gont ?

**Lik Penn-Ruz**

Just, ma den, just ! Mad-tre e tegouez an traou peogwir Katellig Krohen, da vaouez, he-deus prenet diganin brilli evid talvoudegez deg lur ha tri-ugent, war dermen. Gweneg ebed n'he-doa ken. « Jakez a baeo », a lavar-as-hi. Nao real ah-eus da rei din. Med dalh anezo ganit gand bennoz Doue. Kenavo !  
*(Mond a ra Lik Penn-Ruz kuit).*

**Jakez**

Ken-a-vo ? Seiz kant barrikennad kurun ! Setu eur gwall-daol, Gwillou. Skuiz-marzo on a-bouez gop-al e-pad ar mintin a-bez da werza pesked. Netra n'am-eus bet, nag arhant, na gwin, na butun, ha bremaig, er gêr, e rankin debri brilli brein prenet gand Katellig evid ober goap ouzin... Eur wech bennag me lazo ar vaouez-se ! Biskoaz kemend-all !